



## Ar c'hazh hag al logodenn

Skrivet gant : J.M. Salomon

Sioul, e-kreiz ur park bras,  
E-kichen ur wezenn,  
E komze ur pezh kazh,  
Gant ul logodenn.

“Petra'teus graet hiziv ? ”  
A c'houlenne ar c'hazh  
“Me a zo aet da vale,  
`kichen al lenn vras”

“ha te, petra 'teus graet ?”  
lare al logodenn  
“fe, me `meus chaseet,  
E-kichen al lenn”

Piv `teus chaseet  
Aze `kichen al lenn,  
“Laboused pe pesked,  
Pe ur valafenn ?”

Ne oa ket ar pesked,  
Memes ar valafenn,  
Ne oa ket laboused,  
“met ul logodenn”

“Ul logodenn, sur out,  
Unan eveldon ?”  
“Unan just eveldout,  
Unan a-feson”

Just e-kreiz ar park bras  
e-kichen ur wezenn,  
`c'haloupe ur pezh kazh,  
gant ul logodenn.